

LAVARET DREMM AR VRO, LAVARET HEC'H ANVIOÙ (1)

Brudet eo ar chrennlavar kozh diwar-benn hon aodoù tostañ :

Etre Brug ha Traezhtel
Emañ beli an drougavel
Etre Brug ha Trevoù
Emañ beli an diaouloù !

Hervez kont e weler roud troad marc'h an Diaoul etre Brug hag an Trevoù... Ur marc'h hag a anaveze mat Gwrac'h an Trevoù, sur mat !

Ret eo soñjal e oa bet gwallamzer spontusoc'h evit spontus pan oa bet treset an aod ha strewet kerreg treitour e pep lec'h. Avel ha gwent diroll ! alese brud an diaouloù !

Ar bagoù sturiet gant martolod akuit ha fur n'o devoa nemet heuliañ an hent treset gant ar merkoù gwenn savet en aod ivez ha mont hebiou pazinier an drouksperedoù daonet !

Gant piv emañ al lañs brasañ, gant piv e vez talet ar muiañ ouzh ar peñseoù doanuis ?

Etre Treoger ha Lokemo
Emañ palez an Ankoù.
Etre Treoger hag an Tarv
Emañ gwele an Ankoù.

Eme arvoriz kornôg Treger, met diouzh an tu all, war-du ar Reter e kemenner kemend-all :

Etre Pempoull ha Lokemo emañ gwele an Ankoù.

En Treoger e tle bezañ e wele, sur a-walc'h ! A-c'haoliad etre Treger ha Goueloù. Ur gwele war luskellat diouzh ar mor, diouzh an avel, diouzh ar glav... Ur gwele dreset ha dalc'het gant peñseoù niverus ha dibardon... Hep loen spont dindanañ, rak ar spont zo perc'hennet gant loened all ! Ur spont hag a vez gwerzhet hep marc'hata.

En tu aodoù Pleuvihan e ouvezer mat petra ober a-raok tremen Erv an Talberzh :

A-raok tremen Erv-Talberzh
Grit ho kimiad goude kofes.

Gant se, petore repu kavout war an inizi. Kollet er pelloù, el latar hañv a-rez an dour, pe el latar gouañv a oar tamolodiñ aer, kerreg ha tud... Un aezhenn yen o redek a-hed hon c'hein...

Ha koulskoude zo inizi n'int ket c'hoarezed da Shutter Island, na par dezhi memes !

Ar Jentilez, Taveeg, Briad hag o c'hochonou, etre Goueloù ha Treger : repu tud, repu martoloded kollet en ur gorventenn didruez... ha repu an evned. An evned a oar mat kemenn da dud all ar bed bev petra zo o tont. Morvrini koulz ha skreved.

Ha ne lavar ket ur fur bennaket, lonket e anv en lagenn an istor :

Bezañ zo promese a vriedelezh
Entre Taveeg ha Jentilez,
Entre Melbann ha Bonno
Setu echu an embannoù.

Met pegen start ha diaes e c'hall derc'hel e seulioù war douar strizh un enezenn vihan, ha pan vêr manac'h :

Manac'h ruz an Enez-C'hlas
'C'ha da logodenn ha da razh.

Briad, n'emañ ket pell koulskoude. Briad, enezenn ar bleunioù, ar fleur hag ar mogerennoù a-vec'h uheloc'h evit ar pennoù geot. Da grediñ zo e oa an Enez-C'hlas pinijenn veur ar venec'h... Met d'an neb a oar komz ouzh ur varivorgan bennaket, un toullad zo en hon mor ken tost ha ken pell, e c'hall bezañ un disamm eus ar re gaerañ.

Tre evel ma konte, didamant, ar paotr Bilzig en tu Lokireg hag a ouie o hoalañ, emezañ ! Ar pezh na lavar ket ar romant, nemet em bije kollet pajennoù anezhañ. Ma, ur flugez bennak am boa klevet gant ur wrac'h dident ha goapaus dac'h a gostez an Aber-Ildud, du-hont, lec'h n'eus ket tud !

Mari-Vorgan, turlutud,
Deus davidon d'ar Palud,
Hag ac'hane d'an Traezh-Gwenn
Hag ac'hane d'ar Vêlevenn !

Ha ma na gredit ket (ha marteze eo se ar respont !), diwallit na vije lâret diwar ho penn :

Ma Doue ! te zo treud ! Souden e vo gwelet ar Vêlevenn a-dreuz da revr !

Sal-ho-kras, tudoù !

Herve Bihan

Levrlennadur

Studi hag Ober, niv. 17, 1942

Jul Gros, Trésor du breton parlé, teir levrenn, 1970-1977

Feiz ha Breiz, Kerzu 1922

Feiz ha Breiz, Gouere-Eost 1940

Consortium breton, tome 3, n° 13, 1928

Mélusine, tome XI, 1912

Per Pondaven & Yann Riou, Trouz ar Mor, Editions Le Télégramme, 2003

Fañch al Lay, Bilzig, Kemper, 1925

Ul lec'hienn bennak

Diwar-benn Shutter Island, film Martin Scorsese (2010) : <https://www.dailymotion.com/video/xa1kxl>

Devri : <https://devri.bzh/>

Da gaout ar c'hronikennoù all : <https://www.brezhoneg.org/>

[er rubrikenn « blog »]



En Ploumanac'h (dastumadenn Herve Bihan)